

# Koëh en dél

A - pe oé tuem en - hiaul, a pé oé  
 hir - en dé, O dél hui e - oé gloér ha  
 bra-ge - ris - er gué. Pé - beh - ur chan - je -  
 mant! Kol - let e hu - és hou liù, Deit-oh de  
 vout me - len, Klañ oh mer - hât - hi - niù. (bis)

## Un tolpad tud e gan :

A pe oé tuem en hiaul, a pe oé hir en dé,  
 O dél, hui e oé gloér ha brageris er gué.  
 Pebéh ur chanjemant ! kollet e hués hou liù,  
 Deit oh de vout me'én, klañ oh merhat hiniù (bis).

Ur lod kaer ahanoh e zou déjà koéhet  
 Hag idàn treid en dud ind e zou bet flastret ;  
 Més ahoél d'er réral ni e lar : *dalhet mad* ;  
 Rak braùoh é er gué get en déi, ou dillad.

Pen des dél ar er gué un dro balé ér hoèd  
 E ra joé d'hun spered, e ra d'hun horv iéhed ;  
 Més a pen dint koéhet er hoèd n'é ket bourus ;  
 En ur gerhet abarh ni zou melkonius.

Get dél ar hé bareu peb guéen ag er hoèd  
 Zou hanval doh ur voéz get hé dillad éred ;  
 Doh ur huéen hemb dél ér gouian pe sellamb  
 Doh ur voéz é begin hanval mat hi havamb.

Er sapin, ér hélen, ér béz hag ér loré  
 En dél doh er bareu zou staget ol'er blé ;  
 Perak ér faù, én derù, ér haleg, ér hestén  
 En dél ne chomant ket nameit eit un termén ?

Kandalhet enta, dél, de hoarnisein er gué,  
 Elsé ni e gavou bourap'oh er vuhé ;  
 Ar n'oh get plijadur hum zougou hun lagad ;  
 En ined ou hunan e houiou d'oh grat vad.

## En dél.

Er houvi e hret d'emb, o mignonned karet,  
 E hra d'emb plijadur ; més chom genoh berpet  
 N'é ket én hun gelloud : pe bad ré bel un dra .  
 E léh plijein d'en dud, ou añnéein e hra.

Hui e hués hun guélet get en neué amzér  
E foénvein, é tigor get liù guerh ha tinér ;  
Pe zegoéhas miz est ni e oé én hun brud ;  
Bremen ni e zou kouh, kent pel ni e vou mud.

Red e vou d'emb merùel ; achiù é er labour  
En doé get furnéz merchet d'emb er Hrouéour ;  
Aveit hun gouen-ni hir é bet er vuhé,  
Hag a ol hun déieu mat é bet en implé.

Red e vou d'emb koéhel ; ne houilet ket hun marù ;  
D'er ré goann èl ma omb er fin-sé n'é ket garù ;  
Disket kentoh genemb hum blégein d'er Lézen  
E fond buhé en dud, e ra dehi béuen (limite).

En omb, o mignonné, hui e gav ur skeuden (image)  
Ag er péh e zegoéh get en dud ér bed-men ;  
Eit diskoein pen d'er ben en hanvaledigeh  
Etré en dud ha ni, red vehé ur deuéh.

Hou puhé zou hiroh aveit hun buhé-ni ;  
Neoah é pen kant vlé ne viüet ket mui ;  
En dud barh er bed-men ne viüant ket berped,  
Hag èl aveit en dél merùel zou dehé red

Ur plah zou braù ha kriù a pen dé en hé ment,  
Pen dé kouh, hé gened (beauté) e zou oeit get en hent .  
Elsé d'en neué hañ ni e oé braù ha flour,  
Més d'er bareu hun doug ne hramb ket mui inour

Ur lod kaer ahanomb, a pe oent hoah bihañ,  
E zou bet diskaret dré gounar en arnañ ;  
El bugalégeu koant, joé ha g'loér ou mammeu,  
Ind e zou bet skrapet pe oé er gué é bleu.

Epad en diskar-hañ en nerh ag en auèl  
E laka de goéhel un tolpad bras a zél ;  
Elsen ar en dachen ur foéteréh kalet  
E ziskar ar en doar ur bern a soudarded.

Eit rein d'er gué en tu de gas de vad ou fréh.  
Aveit rein d'en ined en tu de guh ou néh,  
Aveit rein goaskeden d'en dud ha d'er loñned,  
Aveit ol en treu-zen é oemb lakeit ér bed.

Mes bremen ol er gué en des taulet ou fréh ;  
En ined eit néhein ne glaskant mui ur léh ;  
Groéz en hiaul e zou goann, hag é léh goaskeden  
En dud e vour én hiaul pe splann adrest ou fen

Martezé ben arhoah ni gollou er vuhé,  
Hag én un toul benag ni e gavou hur bé ;  
Mes ahoél kent merùel ni e ven ar un dro  
Laret d'ch hemb hum glem : *mignonné, kenevo* !

#### *En tolpad tud.*

Ia, kenevo d'oh, dél ; a ol er vad eué  
E hués groeit d'emb én hañ, ni lar d'oh : *trugéré* .  
Pen doh deit ér bed-men, hun guerzeu oé joéius,  
Mes bremen ma het kuit, ind e zasoñ kanvus.

Guir e hues laret d'emb, o dél, hag avel d'oh  
Red vou d'emb ava-men monet devéhatoh :  
Henneh é lod er meud, lod er marh, lod er glom...  
Doué hemb kin, Doué hemb kin berpet er memb e chom

Er B... (1).

(1) Er huerzen-men e zou bet primet é Henbont é miz est devéhan